

11595 694

## CANTIC

### AR GANANEEN.

#### AR GANANEEN.

MAB da David , dre excelanc ;  
MBre c'hraç o pet ouzon truez ;  
Gant eur fe cren va ol esperanç ;  
A lacàn en ho madelez ;  
Guir eo ez ourt eur Gananeen ,  
Mes quittet emeus Tyr , Sidon ;  
Renoncet emeus crenn da Satan  
Evit adori Doue guirion .

Va merc'h a zo meürbet afflijet ,  
Hep caout eur moment a repos ;  
Possedet eo gant an drouc-speret ,  
P'ini e zourmant deiz ha nos :  
Autrou , na vezit qet insansibl  
Eus e foan zo qer violent ;  
Rac deoc'h n'en deus netra impossibl ,  
Pa zoe'h mab d'an Oll-bnissant .

Gaërl oc'h eus sonjal va rebuti .

O tisprijout entent ouzin,  
 Me soulajo va mesmerenti,  
 Eus oéh heuill hirra ma illin.  
 Me esper, dre va ferseveranc,  
 Va feiz, va importanite,  
 O contraign eur vech, hep resistanc,  
 Da barea va infirmite.

Ebestel santed, me ho supli  
 Da bedi ho mestre evidon.  
 Ma neus pareet meur a hini,  
 Ne disprizet qet ac'hanon;  
 Na fel qet dezàn distrei ouzin,  
 E guein a dro din-me soudan,  
 Ha ne glasq nemet ober mez din,  
 Elec'h soulagi va anqen.

### AN EBESTEL.

Jesus a zisque, dre e zilanç,  
 Neus netra da accordi deoc'h,  
 Na ne rit mui dezàn violanc,  
 Na importunitam pelloch.  
 Meritout a rit bez a blamet,  
 Crial er guis-se var e lerc'h;  
 Lest-en en peoch ha paciantet,  
 Hac it da gonsoli ho merc'h.

### AR GANANEEN.

Re vras e zeo, va affliction  
 Da lavaret sur e tafen.

le meus na mez na confuzion.  
avit crial var boez va fenn.  
la na accordit din va reget,  
) prezanti dezàn va c'hlém,  
le och euillo ep manqout camet  
etece percher Jerusalcm.

### AN EBESTEL DA ZOUÉ.

Autrou , ar vreg-mâ incomparabl  
gri hac a ouel var ho lerc'h,  
c'houlen gant eur sez admirabl  
ur c'hraç benac evit he merc'h  
o tourmantet gant an drouc-zperét,  
delivrit-y , mar plich gneneoc'h  
fa voezo e famill dezolet  
in etis an ifern spont oc'h.

Sulvui m'er c'houardrouzomp da dével  
la d'on dilezel da vont en hent,  
tant aon na deufac'h d'e dilezel,  
cri huelloc'h eguet qent;  
lo pedi a ra hac ho pressi,  
implich a ra pep seurt moyen,  
la zonet erfin d'oc'h angagi  
da gaout truez eus e anqen.

### DOUE.

Va zad en deveus va digasset  
trezec ar bobl a Israel,  
era benac ma zint obstinet,

Ingrat , infidel ha cruel.  
 Ne deo qet déuet c'hoas an amizer  
 Da entent eus ar bayanet ;  
 Mes tenna fel din eus a zanger  
 An danvad am'boa dianqet.

### AR GANANEEN.

Autrou , mezi , p'ini a adoràn ;  
 Humpla ma zeo possibl din ,  
 A nevez flam en ho suplian  
 Da gaout compassion ouzian ;  
 Recour a illit din va buez ;  
 Ha lacat fin d'am oll dourmant ;  
 Va zicourit dre ho trugarez ;  
 Pe me varvo gant nec'hant.

Da eur sant Mathurin qen ingrat ,  
 Da eur Vadalen debordet ,  
 Da eur vreg clan gant ar flus goad ,  
 Oc'h eus accordet o'reqet ;  
 Nemédon-me , ta , Cananeen ;  
 Ne vezо gueneoc'h refuzet ,  
 Abalamour ma zon payanez ,  
 Em lest en pris gant an drouc-speret.

### DOUE.

Greg , ho merc'h a zoufr ur sort anqeh ,  
 En punition d'e fec'het ;  
 Mes ne lezin qet va judevien  
 Evit trei eus ar bayanet.

Da nicun maro na zeziràn,  
Né refuzân den eus va c'hraç ;  
Mes eun dra injust bras e cafen  
Rei bara bugale d'ar chass.

### AR GANANÉEN.

Autrou , emezi , guir a leret ,  
Né veritân qet ho para ;  
Mes dre ho madelez infinit ,  
Roit din ar bruzun anezâ.  
Pera benac ma zoun payanez ,  
Plijet gueneoc'h ma testumin  
Dindan ho tol , eyel ur guiez ,  
Ar bruzunadoù à guiyin.

Ne c'houlennâr nemet ar bruzun  
I goe eus ho tol d'an douar ,  
Pere na refuzac'h da nicun  
Deus oc'h anevalet brutal .  
Se fel din en em humilia  
Yho treid , a gorf hac a spéret ;  
Ia ne scuizin qet d'ho suplia ,  
Den n'am bezo bet va reget

### DOUE.

Greg , ho fe hac ho perseveranc  
Lo cri , ho chuanadou hir ,  
Deu da drec'hi va rezistanç ,  
Ezet grêt erves ho tezir .  
Als mui evidoc'h-hu e carem

Guelet ar fin eus oc'h anui ;  
 Mes eur blijadur vras e cavàn  
 Clèvet tud humb eus va fedi.

Gant cun êr rust è comzen ouzoch',  
 Evit oc'h aprouv güel a ze,  
 Pera benac m'am boa sonch ouzoch',  
 Gant truez eus oc'h adversite,  
 Evit ya gloar hac en ho profit  
 Emeus grêt van d'ho refuzi,  
 O tiſquez déoc'h ne ell den gounit  
 Ar victor anez combati.

Ne garân qet ènn ene clouar,  
 A deu prest d'en em relachi,  
 Hac a goe e gourach d'an douar,  
 Pa zaleàn d'en exauci,  
 Goulennit, pedit, importunet,  
 Pa vezoc'h en oc'h orézon,  
 Evel se e cresqo ho merit,  
 Hac e c'honfet va c'halon.

Cals tud a ziles o fedennou,  
 Pa fel din exerci o fe,  
 Ha pa guzàn va sclérigennou,  
 Evit ma clasqfont gueil a ze ;  
 C'houi a zisquelo dre ho ferveur,  
 Ho fe hac oc'h humiliite,  
 Ne eller accordi nep faveur.  
 Nemet dre importunitate.

It en peoch'ha, ha sec'hit ho taclou,  
Obtenet oc'h eus ho reqet;  
Io merc'h a voar dija ar c'hêlou,  
Iac'h eo a gorf hac a speret.  
Duspen m'am eus roet dei yec'het,  
Roet emeus graç deoc'h o tiou;  
Mes tec'hit a doues ar bayannet,  
Vadorit mui o doueou.

### AR GANANEEN.

Autrou, ho trugarecât a ran  
Demeus oc'h oll madelezou,  
Oc'h anavezout a zezirân,  
Iac'h enill oc'h oll gourc'hemanou.  
Da deui an ælez eus an ênvou,  
Da deui an dud yaouanq ha coz  
Da gana'oc'h oll meuleudiou  
En douar hac er barados.

Neuze gant he merc'h voa eruet :  
Va mam, echu va néc'hamant;  
Ar yec'het a zo din-me rentet,  
Ne meus mui aon deus va zirant;  
Chasset ez eo pel diouzin,  
Mes piop eo va liberateur?  
A viqeu e garet a fel din,  
Hac e servicha gant ardeur.

Ar guis Vessi, pini zo deuet,  
Zo, va merc'h, ho madoberour;

Enhes en deveus o telivret  
 Deus a c'hrifou oc'h adversour.  
 Eur beden aroset gant daelou  
 A zo agreabl bras dezàn,  
 Na n'en eus qet a greoc'h armou  
 Evit triomphi anezàn.

Consacrömp hör c'horf hac hon ene  
 D'ar Roye bras dèmeus ar bed ;  
 Evit nep poan n'hac aduersite ,  
 Ne scuizomp qet eus e garet ;  
 Ne dransgressomp qet e lezennou ,  
 Bezomp ato fidel d'e c'hrac ,  
 Ma elfomp oll goude hor poaniou ,  
 Er guelet en èe laç-a-faç .

**FIN.**




---

E Montroulez, eus a Impr. LÉDAN.